

985 A

RECIT TERRUBL

Composet var Sujet un TORFET BRAS

COMMETET EN PAROS POULLAOUEN

AR C'HRIM BET CUZET A DIZOLOET



Var un ton trist.

13

Mest an Env ag an douar Roue ar Firmamant,
Dont a ra do inv'oki gant eur galon ardant,
Da rei eur moment amzer, sclerijen d'am speret,
Vit ma c'hallin discleria dirag ar vretonet.

Un torfet so commetet, en paros Poullaouen,
Ag a laka da grena kalon meur a gristen,
Kement a deu d'er c'hlevet gant gwir intation,
A ve touchet ho c'halon eus a gompasion. --

Ebars er bloavez presant, eo ar c'hrim commetet.
Pa sojan er malheur man va c'halon so mantret,
Marie Baill deus bet ranket sioas soufr ar maro
Entre daouarn he phriet, zelaouet tud va bro.

Bec'h holl me a zisclerio gant an holl gwirone
Sirconstansou ar malheur ag he enormile,
Ne lezin netra, cuzet pep den scler a velo,
An neubeut a garante so entre ar priejo.

Dre ma vank ar garante e sao ar gassoni
A dre ze tha mil malheur teuer da gommeti
Kerhamon dre gassoni vougas he eill priet,
Sonjal vije adare da un all eureujet.

mau safaet gant le s'ceur d'ad

An tirant man a garie kals al lubrisite
Ag araog maro he vreg nevoa gret promese.
Dre ze' neus bet gret dezhi soufr eur maro kruel,
En nosvez ma devoa bet, ia, ganet he bugael.

Marie Baill oa coulsgoude plac'h a zoare greg fur -
Ag ep zikour tud ar bed c'hanez he c'hraouadur
Ne oa nemethi en ti, ag phriet barbar,
Pa d'oa ganet he bugael da zont var an douar.

Fanch d'he vam a deur plac'h all, a neus bet lavaret,
Dont buan da vailluri ar bugael oa ganet,
Goude pa oa mailluret, oa laket d'he gavel
Marie c'heas en he gwele, ia, da c'hortos mervel,

Homan neuze lavaras d'an diou plac'h mont d'ar gaer,
D'he goas mont he ne wele un neubeudik amzer,
Hi a oa gren a dispos dre ze c'halent ive
Mont da gemer ho repos, da c'hortos ar beure. -

Mes ar monstr deuz an ifern chomas var ar bale
Vit finisa he bue d'he vreg en he gwele
Pa ne oa ken nemethan c'homet ebars en ti
E nevoa bet ar galon da vouga anez hi.

- Ne neus ket a zorojou er bed universel
- Vefont oll kals pe neubeut scoet gant an avel.
Ag en tre ar priejou ve sur meur a raison,
Neus fors pegen fur tud int na deus pe sort canton

- O! me o ped cristeinien considerit breman,
Bars er galon dinatur eus an-den cruel man.
Goude bea eureujet deur plac'h en ti Doue,
Ober entre he zaouarn, dezhi koll he bue.

- Pa nevoa gret he torfet c'heas adare zouden,
Da laret d'he vam dont di a d'he amezeien,
E nevoa kavet maro he vreg en he gwele,
- C'hwec'h sizun eo bet kuzet an torfet er c'hontre.

- An diou plac'h nevoa bet corf Marie liennet,
- Devoa remerket he gouk, un nebeudik duet,
- Sonjal rent oa bet preset he maro sur dez hi.
- Mes doa ket hardieges da dont da zeclari.

En de oa et ar victim e beret Poullaouen,
-An tirant a oa contant a zeder cristeinien,
Sonjal oa prest adare da vea eureujet,
Ag e oa bars ar bed man kuzet brao an torfet.

Dre c'hras ar gwir Brovidans oar deut da zisolo,
Eur c'hrim a so ken horrubl cōmmetet en or bro
Pa oa Fanch vont adare ken pront da zemezi,
Ragtal oa zavet ar gaos nevoa mougaet Marie.

Doctoret a Kerhaez, justic ar archerien
Evit gout ar wirone so deut da Poullaouen,
Gret o deus dizeteri corf paour ar verzetres,
Oa he kalon an douar c'hwec'h zun a oa tud kes.

Kerkent ma oa bet savet ar c'horf demeure he ve,
E welet mad sur he gouk duet an daou goste,
Ha dre ze an doctoret deus bet anavezet,
E oa bet en gwirone Marie ar Baill-mougaet.

Ar re a oa o sevel ar c'horf eus he archet,
-A grene ho izili ho goad a oa frimet
Ag an oll assistantel oa mantret ho c'halon
E welet eur sort torfet cōmmetet er c'hanton.

Ar c'hriminal klask cuzet cristenien he torfet,
Oa et da boket d'he vreg, vel ma noa e gwelet,
C'hoant rei da gredi da dud oa sur den a zoare, —
-Ag e karie anezhi gant eur gwir garante.

- Goude ma re Kerhamon kemen(eus a ardou, —
He zaoulagad va c'hredit scuilet ket a zaerou,
-Me gret ma oa he galon, eus a c'hlae'har marget, — *mantret*
Eo dre ma oa bet manket da vea eureujet,

☞ O ! Lec'h bea eureujet, neuze an archerien
A oa deut d'he gondui da doul ar vuntreien
Da c'hortos ar c'hour d'assis evit bea barnet,
Gant justic a lealdet pa nevoa meritet.

Pad ma oa sur er prison, he neus bet declaret,
E nevoa e gwirone he eill priet mouget,
A da nao a vis east, eo barnet e Quimper,
Da veva pad he vuc, evel eur gwir yuntre.

Fanch da nao bloa var n'ugent a neus gret he torfel,
Rankout kuitat he gerent, he vro he vignonet,
Marie da zaout a tregont, so gret dei cristenien,
Mont da renta he c'hene d'or Salver Souveren.

Cetu aman bretonet un exempl a trista,
Me o ped a wir galon da zonet d'er prena,
Mes ne heuillomp ket an hent a neus gret Kerhamon,
Goulenomp oll gras Doue, bevomp en union.

An nep a neus ar werz man en neve composet,
So he hano Louis ar Brun, var ar pâper scrivet,
A re-ket chans a bonheur d'an oll var an douar,
A gras goude da vea curunet bars er gloar.

(Propriété de l'auteur et tout droit réservé)

Louis LE BRUN.

812
199-200
Dun a g'g'g'

KIMIAD AR C'HRIMINAL



Goude bea barnet

Var ton ar Roue Gralon.

I

Holl habitantet Poullaouen,
Clevit eur wez leun a anken,
Mwez un den p'hini so sioas
Bet eur muntre, un tirant bras.

II

Me a so eur misellour scler,
Da gals a dud bars er c'hatier
Nep gompreno em flaneden,
A vevo en gwir gristenien.

III

Nem rofont ket d'ar fallente,
D'ar pec'het a lubrisite,
P'hini eo ar soursen sioas,
Deus a gement a grimou bras.

IV

Me a moa laket ma speret,
Da garet re eus a verc'het,
A dre ze hon bet eur barbar,
E kever un var an douar.

(155)

V

An hini glejen ar muia,
Karet anezhi er bed-man
Meus bed ar galon diremet,
Sioas d'he mouga bretonet.

VI

Sonjal eureuji adare,
Eur feumeulen all em c'hontre,
E meus dre nerz an droug speret,
Mouget Marie, va eill priet.

VII

Lec'h eureuji deur feumeulen,
Ebars en ilis Poullaouen,
So choaset evit priet din ;
Solier nouvelle Calledoni.

VIII

Raog mont da bea va ranson,
Kuitat va bro a va c'hanton,
Me a deu da kimiadi,
Ous kement den a so enhi.

IX

Adieu va mam, adieu ma c'houar,
Me a so kiriek d'ho glac'har,
Ho kalon ne vo zeder,
E compren bars em c'hroas poner.

X

Adieu d'an ti m'hoan bet ganet,
Adieu kerent a mignonet,
Me o ped deut da gonsoli,
Va mamik paour en he c'hosni.

XI

Adieu did ma bugael bian,
Breman ne po na tad na mam,
Te a so eur minor iouank
Dre ma eo bet da dad tirant.

XII

Adieu dec'h oll coz a iouank,
Adieu da gement so present,
Neur scluil kals a zaero c'houero
Lavaran dec'h oll kenavo.

XIII

Adieu da Tour Dauvergne ive,
So henoret e pep contre,
Dre m'eo bet en he amzer,
En Frans ar c'henta grenadier.

XIV

Adieu da baros Poullaouen,
D'he beret a d'he beleien,
Pere deus bet ma c'helenet,
Da hent gundu da evrustet.

XV

Adieu dec'h kleier ma faros,
Nô klevin mui na de na nos,
C'hervel o gristenien fidel,
Da vont da ofisou santel.

XVI

Adieu breman da Huelgoat,
Gant cals demeus a galonat,
-Da yourk Scrignac, da yourg Berrien
-Adieu lavaran vit biken.

XVII

Adieu d'ar gaër Kerhaes,
Lec'h ma hon bet sur alies,
Breman ken sur dre ar ruiou
Ne vo klevet trous va botou.

XVIII

Breman pell eus a Vreiz-lzel,
Me a vo kasset da vervel,
Touez ar vuntrerien al laeron,
Allas vit pea ma ranson.

XIX

Evidoc'h kerent a tud ma bro,
Me pedo Doue hon aotro,
Da drei divarnoc'h bars er bed,
Ar gwel blanedenou kalet.

XX

C'hui pa glefoet e vin maro,
Deut ive ma plich tud ma bro,
Da laret pater pe ave,
En dilivrans eus va ine.

XXI

Goude ma c'hon bet eur muntret
Dre verit Jesus or Salver,
Esperan goude ma deiou,
O kwelet oll Bars er Joaiou.

